

# AR RINOÙ NEVET E KELTIA

---

Lidoù neveskeltiek

JEZUZ KRIST  
ROUE TRECHOUR



EVECHE-ABBAYE CELTIQUE  
S<sup>t</sup> DOLAY (CORBIHAN) BRETAGNE

ESKOPTI KELTIEK

Abati ar vezans nevet

LANZOLIEG

Bro · Wened

BREIZH

Pep gwir miret strizh

---

— NOEL 1959 —  
N° 111 bis  
NUMERO SPECIAL  
— hors série —

" LA BRETAGNE RÉLLE "  
organe bi-mensuel  
T R I B U N E L I B R E

---

PRIX ; 5,00 frs  
Abonnés ; 2,50 francs

---

## Principes

Le PEUPLE BRETON forme une communauté ethnique homogène nettement différenciée de ses voisins, habitant depuis une longue période historique un territoire qui lui est propre et possédant des BESOINS ECONOMIQUES dépendant de la structure de ce territoire et de sa population.

LE PEUPLE BRETON a des droits, *fondés sur son histoire*, dont la grandeur ne le cède en rien à celle de l'histoire des autres peuples, *sur sa culture et sa langue*, dont l'originalité le distingue nettement parmi les peuples et par lesquelles il a le droit et le devoir de concourir à l'harmonie du monde civilisé.

Le DEVOIR DES BRETONS est de *prendre conscience de ces réalités*, de comprendre qu'en sauvant LES DROITS DE LA BRETAGNE, ils garantissent en même temps sa PROSPÉRITÉ aujourd'hui sacrifiée à des intérêts qui leur sont le plus souvent étrangers, *d'unir leurs efforts* pour que, eux mêmes et leurs enfants ne connaissent plus l'humiliation du reniement et l'asphyxie économique, mais LA FIERTÉ DES HOMMES LIBRES, DANS LA PAIX ET LA JOUISSANCE DES FRUITS DE LEUR TRAVAIL.

B. R.

LA B. R. N'EST PAS UNE ENTREPRISE PHILANTHROPIQUE

MAIS UNE ENTREPRISE QUI DOIT ASSURER SON **AUTOFINANCEMENT**  
CELA IMPLIQUE DONC QU'ELLE GAGNE DE L'ARGENT POUR POUVOIR **SE DÉVELOPPER!**...

H O R Y E Z H

KELAO UENN A YEZHONIEZH

KOMANANT-BLOAZ : 1.000 Lur  
Mlle J. QUEILLE

47, rue Notre-Dame — GUINGAMP  
C. C. P. 1240 - 22 — Rennes

Abonnements : 1.000 frs l'an  
Etudiants, Militaires : 600 frs.

A R V R O

REVUE TRIMESTRIELLE D'ETUDES BRETONNES  
Rédigée principalement en Français

C. C. P. 1493 - 79 — NANTES

J. DESBORDES

14, rue Colbert — CONCARNEAU


YESOUS KRIST  
ROUE TREC' HOUR  
ESKOPTI KELTIEK  
ABATI AR VEZANS NEVET  
LANZOLIEG. BRO-WENED. BREIZH

R A G L E N N

Er bloaz santel MDCCCCLV, d'an trede noz a viz Genver,  
ez eas ul lean e-kreiz ul lanneg a Vreizh;  
er goañv, da vare ar serr-noz, edo o kutuilhañ avalou-  
pin er c'hoad tostik evit enaouiñ e dan,  
pa damvelas e-mesk ar bodoù, an drez hag ar banal, ur  
rañved kozh.

Bendeiz a-ziwar neuze e labouras d'e addigeriñ.  
Peurheñvel nend eo ken ouzh ar rañved a voe gwezhall,  
met an neb a gerzho war e hed a adkavo un adskleur eus  
gweledva an hendadoù, a analo aer glan an amzer a wezhall hag a ve-  
pred, a zizoloy disheoliadennoù pa domma an heol, enciennoù a zisec-  
hed, noziou marzhus marellet gant al loar hag ar stered a arvestas  
peurziogel oute hor re gozh.

An neb a c'hello meizañ, meizet a lavar an Awen da Iliz  
ar Galted.



Sant Y. V. PERROT, nationaliste breton  
prêtre et martyr.

Mat da vout moulet. Lanzolieg, d'an 19 a viz Mae 1959 Gouel Sant Ewan  
TUDUAL I-ân Abad-Eskob.

AR RINOÙ NEVET E KELTSIA

Lidoù neveskeltiek

I

LID GWISKADUR AN OFERIDI -

Pa zeu poent al lid ez a an oferidi e-barzh ar gwiskva;  
o kevarc'hiñ izelstouet ar Groaz nevet, oc'h astenn e zaouarn davet  
an neñv, oc'h emblegañ betek stekañ ouzh al leur gant tri biz e zorn  
dehoù (biz-meud, biz-yod ha biz bras kenunanet) e lavar teir gwezh  
pep hini anezhe :

A Zoue, bez a-du ganin, pec'her ma'z on, ha truezus ouzhin !

Da c'houde en em walc'hiñ a ra an daouarn ha lavarout :  
Aotrou Yesous Krist, te na nac'has ket dour ar feunteun strinkus  
ouzh ar Samariadez, na daol ket pled ouzh va fec'hedoù ken niverus,  
va gwalc'h te da-unan, evel ma rejout gwezhall evit da ziskibled  
kent lidañ da vanvez kevrinek. Hevezet !

Ar re a wisk ar sae a lavar en ur boket dezhi :

Va gwisk, Aotrou, gant an den nevez bet krouet hervez Doue e gwirion-  
ded ha neveted ar wirionez. Hevezet !

Ar re a wisk ar c'hougoul pe an avizh a lavar :

Aotrou, Jaka warnon tokouarn ar silvidigezh ma vezo va meiz un douar  
strujus na hado ket ennañ an aerouant dreog ar prederoù aner. Hevezet !

Ar re a wisk ar gamz a lavar en ur boket d'he c'hroaz :

En abeg da namm orin hon denelezh, aotre din, Aotrou, kannañ atav  
va c'hamz e gwad an oan. Hevezet !

Ar re a c'houriz ar gordennig a lavar :

Ro din, Aotrou, ar wirionez e-giz gouriz; ra vougo em divlounezh  
gwrez ar c'hoantegezhioù, ra vezo va nerzh, ra eeuno va hent. Hevezet !

Ar re a wisk ar arvilginoù pe an dornadelloù a lavar en ur boket dezhe  
Gra, Aotrou, na ankounac'hain ket drantiz an eost pa zougin feskenn  
an daeroù. Hevezet !

Ar gloer a lavar en ur wiskañ o arouezioù :

Te eo, Aotrou, lod an herezh a daol din ar Gi'b. Dalc'h al lod-mañ  
evidon. Hevezet !

Bez'e lavar ar borzhierion :

Ro din, Aotrou, an alc'houezioù a zigor an nor, pa stokez evit mont  
da goaniañ ganin. Hevezet !

Bez'e lavar al lennerion :

Gra ma vezin, Aotrou, ul lenner aketus eus da c'her ma c'honzin  
gopr ebestel ar prantadoù kantañ. Hevezet ! - Adnevez ennon, Aotrou,  
Riez an Awen ha galloud yac'haat an neñv. Hevezet !

Bez'e lavar ar golisted :

Elum ennon, Aotrou, da c'houlou, ma tiforc'hin ha ma'z embannin ar  
pezh a zo da, eeun ha gwir. Hevezet !

Bez'e lavar an abostolerion :

Va gwisk, me az ped, Aotrou, gant sae an drantiz, na chanin ket a'z  
kanmouliñ. Hevezet !

Bez'e lavar an avielerion :

Va gwisk, Aotrou, gant kazul-verr ar silvidigezh hag al levenez, ma lidin ha ma embannin dalc'hmat klod da Anv hollvriek ha meurdezus. Hevezet!

Ar c'hudaerion hag an eskeb a wisk al lorig pe gazul en ul lavarout :  
Gwisk da c'hudaerion gant an eeunded, Aotrou, ma trido laouen da gre-dennourion ha ro da bep hini skoed ar feiz da vougañ holl viroù entanet an aerouant. Hevezet!

An avielerion, ar c'hudaerion hag an eskeb a gemer ar stol en ul lavarout :

Daskor din, me az ped, Aotrou, ar sae a beurbadelezh an eus kollet dre fellerezh hon tad kentañ ha na nac'h ket ouzhin ur rann eus ar wezenn vuhez. Hevezet!

Da c'houde ez a an holl enne o-unan dirak delwenn Grist en ul lavarout :  
Aotrou Yesous Krist, bet diskleriet evel mab Doue gant galloudezh, hervez an Awen a neved, dre'z tasorc'hidigezh eus ar re varv, aotre ma tegemerimp da c'hras hag hol lakay sentin ouzh ar Feiz, ez Anv, peogwir ez omp bet galvet da vout sent drezout; Dit te, da Zoue, hon Tad ha d'an Awen Nevet, ra vezo pep bri ha pep klod, a viskoazh da viken. Hevezet!

En em stouñ a ra an holl hag oc'h en em dreiñ war-du ar Werc'hez hollnevet e lavaront :

Digor dimp dor da drugarez, â te hollnevet, hollc'hlan, hollveniget, intron glodveurek, mamm da Zoue, â Varia werc'hez bepred, na gemerfemp ket un hent drouk p'emañ hor goanag ennout, ha ma vezimp digabestret drezout eus hor stad arvarus, ha ma tizhimp, sturiet ganit porzh ar silvidigezh peurbad ma kavimp eno ennout ur vreutaerez c'halloudus hag un difennerez efedus dirak lezvarn spouronus Krist. Hevezet!

Bez'en em stou an holl hag an avieler a lavar :

Boulc'himp e peoc'h !

Bez'ez eilger an holl :

En anv an Aotrou. Hevezet !

Mont a reer tre e-barzh an Iliz ha lidkerzhout en ur ganân Introit an deiz en doare ma en em stouo an holl dirak an aoter pa zeuor d'ar gentel.

## II

### LID AR SPARFEREZH NEVET-MEURBET

Bez'e kaner :

Va sparf, Aotrou, gant ar sikadez hag e vezin glan; va gwalc'h hag e vezin kannoc'h eget an erc'h.

Lidganenn : AZ peztruez ouzhin, â Zoue, hervez da drugarez veur.

Bez'en em stou an holl :

Klod d'an Tad, ha d'ar Mab, ha d'an Awen Nevet.

Sevel a reont ha lavarout :

Evel ma oa er penn-kentañ ha bremañ hag hiviziken, a viskoazh da viken. Hevezet!

An avieler pe ur gudaer kevlider a gemer ar sailh hag ar sparf.

Al lider a astenn e zaouarn hag a lavar : Pedomp !

Neuze an avieler a ro dezhañ ar sparf bet soubet en dour glanaus;

4.

treiñ a ra lerc'h-ouzh-lerc'h al lider davet ar sav-heol, ar c'hreiz-teiz hag ar c'huzh-heol hag, oc'h echuiñ gant an aoter, sparfañ, tresañ ar groaz ha lavarout :

A Zoue, ni az ped uvel, teurvez + glanaat, + nevetaat, + bennigañ ha + gouestlañ da neved evit ma vezo dellezek a lidadur da rinoù nevet ha dinamm ha bevaer. Dre Yesous Krist, da Vab hag hon Aotrou, ra vezo dezhañ, a-unan ganit ha gant an Awen Nevet pep bri ha pep klod a viskoazh da viken. Hevezet !

Al lider a ya d'an aspled hag a sparf teir gwezh an arvesterion : a-  
gleiz, er c'hreiz hag a-zehoù, ha lavarout :

Dalc'hit koun ez oc'h bet badezet + e Krist, bet marvet + gantañ, bet dasorc'het + gantañ, hag a aotre deoc'h / distaol / diabet / ho faziou, dre ar -- sparferezh nevet meurbet.

Bez'ez eilger an holl :

Hevezet !

III

### LID AN ANZAVADEG

Pignout a ra al lider ouzh an aoter, sevel levr an Avielob nevet ha gantañ ober arouez ar groaz war an aoter en ur ganañ :

+ En Anv an Tad, hag ar Mab hag an Awen Nevet !

( En anmani Atros etik Mapi etik Aueni Nemeti! )

Bez'ez eilger an arvesterion : Hevezet !

P'en deus al lider lakaet an avielaouer war e lec'h, e kreizon an aoter e tiskenn hag e kan :

Va blegn, Aotrou, davet gouloù da glod gant un drugarez hag un eeuned diganit-te da un.

Bez'ez eilger an holl : Hevezet !

An abostoler pe ur beleg kevlider, a gan ouzh ar marc'h-levr, troet davet an arvesterion :

Iennadenn lezenn Zoue;

Diouzh levr an Anvoù; (pe: Diouzh levr Chemôth 20,1-17)

Elohim a lavaras an holl gomzoù-mañ gant lavarout :

"Me eo Yahweh da Zoue az lakaas mont er-maez a Vro-Eift, er maez eus ti ar geizh :

Doueed arall n'az po ket dirak va dremm.

Delwenn ebet ne ri, na skeudenn ebet eus ar pezh a vez e-barzh an neñvou el laez, nag a vez war an tir en diaz, nag a vez en दौरioù endan an tir.

Ne stoui ket diraze ha n'o gwazoni ket. Peogwir ez on me Yahweh da Zoue, un Doue ag oaz, a gastiz fazi an tadoù war ar vibion, war an trede rummad, ha war ar pevare rummad, evit ar re am c'hasa, o tigastizañ betek ar milvet hini evit ar re am c'har hag a zalc'h d'am c'hemennoù.

Ne zistagi ket evit ar gaou anv Yahweh, da Zoue, peogwir ne zinaam ket Yahweh an neb a zistag e anv evit ar gaou.

Dalc'h koun eus deiz an ehan evidout d'e nevetaat.

C'hwec'h devezh e labouri hag e ri da drevell a-bezh,

hogen ar seizhvet deiz a zo an ehan evit Yahweh, da Zoue; ne ri trevell ebet, na te, na'z mab, na'z marc'h, na'z mevel, na'z matezh,

na'z pioù, na'z tegemeriad a zo ez torioù, peogwir ez eure fam. 31 e  
c'hæc'h devezh an neñvoù hag an tir hag ar mor, ha pep tra a vez en-  
ne, hogen e tiskuilhas d'ar seizhvet deiz. Pe evit tra eo e vennigas  
Yahweh deiz an ehan hag e nevetaas.  
Kehel da dad ha'z mamm, evit ma vezo astennet da zeizioù war ar glen  
a ro dit Yahweh, da Zoue.

Ne lazhi ket.

Ne avoultri ket.

Ne laeri ket.

Ne desteni-ket diwir a-enep da nesañ.

Ne c'hoantai ket ti da nesañ. Ne c'hoantai kat gwreg da nesañ, nag e  
vevel, nag e vatezh, nag e ejen, nag e azen, na tra ebet a vez e  
piaou da nesañ."

Kement se a lavar an Aotrou.

Bez'e kaner an eilgeriadenn :

- Gwenn o bed ar re eeun en o hent  
a gerzh hervez lezenn an Aotrou.
- Gwenn o bed ar re a zalc'h d'e gemennadurioù  
hag e glask a wir galon.
- Un arallvroad on war an tir  
na guzh ket ouzhin da gemennoù.
- Pella diouzhin hent ar gaou  
hag aotre din heuliañ da lezenn.

Ouzh ar marc'h-levr d'e dro e kan an avieler :

Lennadenn an aviel nevet hervez mazhe (22,34-40)

En amzer-hont,

O vout gouezet en doa serret genoù ar Saddoukidi, en em vodañ a eure  
ar Farisaïdi.

Un anezhe, den al lezenn, a atersas outañ evit e zroukhoalañ :

Aotrou, pehini eo kemenn brasañ al lezenn ?

Eilgeriañ a reas Yesous : Karout a ri Yahweh, da Zoue, gant da holl  
galon, gant da holl ene, gant da holl c'halloud.

Ar brasañ hag ar c'hentañ kemenn eo.

Heñvel eo an eil ouzh ar c'hentañ : Karout a ri da hentez evel d'out-  
te da-un.

En daou gemenn-se e kaver al lezenn hag an Diouganerion a-bezh.

Bez'e kaner an eilgeriadenn :

- Staget eo va ene ouzh ar bouldrenn  
Daskor din ar vuhez hervez da c'her.
- Ra zeuy warnon da drugarez, â Aotrou  
ha'z silvidigezh hervez da ouestl.
- Da zacuarn o deus va c'hrouet, va stummet o deus  
ro din poell ma teskin da gemennoù.
- Kantreer on, heñvel ouzh an dañvadez kollet  
kerc'h da vevel peogwir ne ankounac'haan ket da gemennoù.

En em stouñ a ra an holl ha kanañ an anzavadeg :

Aotrou, va Doue, meur ha spouronus,  
hag a zalc'h da gevredad evit ar re az kar hag a heuilh da gemennoù,  
te hag a vez trugarezus oute,  
pec'het hon eus; graet hon eus diswirderioù; bet omp drouk ha disuj;

6.

troet hon eus diouzh da gemennoù ha'z urzhiadurioù, n'hon eus ket da azgoulennet, te, hon Doue; n'hon eus ket dilezet hon diswirderioù; n'hon eus ket bet evezhiek ouzh ar wirionez.

Dit-te, Aotrou, eo an eeunder, ha dimp-ni displander an dremm, dre m'hon eus pec'het ouzhit. Va Doue, digor da ziskouarn ha selaou ! Digor da zaoulagad ha sell ouzh hon dismantrou.

Rak en abeg d'hon eeunder nend eo ket e kinnigomp dit hon aspedennoù, en abeg d'az kendruez veur eo.

Selaou, Aotrou. Distaol, Aotrou! Bez war evezh, Aotrou, gra ha na zale ket, dre garantez ouzhit, â va Doue !

Rak evidomp, en deus eñ gouzañvet, da Unc'hanedig ra vezo dezhañ a-unan ganit ha gant an Awen Nevet pep bri ha pep klod a viskoazh da viken. Hevezet !

Lider : Kurie eleison ! ( Az pez truez, â Aotrou ! ) Kredennourion :

Kurie eleison ! Lider : Kurie eleison !

Kred : C'Hriste eleison ! ( Az pez truez, â Grist ! ) Lider : C'Hriste eleison ! Kred : C'Hriste eleison !

Lider : Kurie eleison ! ( Az pez truez, â Aotrou ! ) Kred : Kurie eleison ! Lider : Kurie eleison !

An holl a chom emstouet: al lider a sav hag a gan ar pennadoù hag ar dud a eilger oute :

P/-- A Zoze, gra ma advevimp; en em dro davedomp.

E/-- Ha'z zenel en em laouenay ennout.

P/-- Diskouez dimp, Aotrou, da drugarez.

E/-- Ha ro dimp da silvidigezh.

P/-- Bez evezhiek ouzh va fedenn, Aotrou.

E/-- Ra'z tizho va garm.

P/-- Emañ hor skor en anv an Aotrou.

E/-- A eure an neñv hag an tir.

P/-- Ganeoc'h emañ an Aotrou. E/-- Ha gant da Awen.

Lerc'h-ouzh-lerc'h al lider a astenn an daouarn, o stroll hag o adastenn. Chom a ra evelhen tra ma ped.

Pedomp. Lam diouzhimp, Aotrou, ni az asped, hon holl ziswirderioù ma c'hellimp (pignat a ra al lider ouzh an aoter) mont e-barzh neved an nevedoù, gant speredoù ha kalonoù glan, a-gevret gant da aelez ha kenunanet gant da holl sent (poket a ra d'an aoter) dre Yesous Krist hon Aotrou, ra vezo dezhañ a-unan ganit ha gant an Awen Nevet pep bri ha pep klod a viskoazh da viken.

An dud a eilger : Hevezet !

Al lider a astenn e zaouarn war an dud emstouet hag a lavar :

Degemerit an Awen Nevet, distaolet eo ho pec'hedoù, en abeg d'e anv koldveurek, an Tad + hag ar Mab hag an Awen Nevet.

An dud a eilger : Hevezet ! Al lider a ro ar vannozh :

Grad-vat an Aotrou Yesous Krist +, karantez Doue ha kenunaniezh an Awen Nevet ra vezo warnoc'h e'hwi holl.

An dud a eilger : Hevezet ! An holl a sav neuze hag a echu lid an absolvenn nevet dre ganmeulif an Hini leun a drugarez : D'an Hini hor

c'har, en deus hon digabestret diouzh nor fec'hedoù dre e wad hag en deus graet ac'hanomp ur riez a c'hudaerion evit Doue, e Dad, dezhañ ra vezo a-unan gant an un Awen ar c'hlod hag ar c'halloudezh a viskoazh da viken. Hevezet.

A- G O U R S E Z    H O L L E K  
pe  
G O U R S E Z    A R    G A T E K I Z I D I

Pa zegemer al lestr-ezañs, al lider a vennig anezhañ hag a lavar :  
Ra vezo + benniget an ezañs-mañ gant an Hini ma tevo en e vri.  
Tra m'emañ ar c'hor o kanañ ar gwenvidigezhioù, laouen ma'z eo bout  
bet dinammet, al lider a ezañs an aoter, an oferidi, an iliz hag  
ar c'hoursez.

- Gwenn o bed ar re gaezh o spered  
rak riez an neñvoù a zo en o fiaou.
- Gwenn o bed ar re a ouel  
rak inti a vezo frealzet.
- Gwenn o bed ar re guñv  
rak inti o devezo an tir da herezh.
- Gwenn o bed ar re o deus naon ha sec'hed ag eeunder  
rak inti o devezo o gwalc'h.
- Gwenn o bed ar re drugarezleun  
rak inti a gavo trugarez.
- Gwenn o bed ar re glan o c'halon  
rak inti a welo Doue.
- Gwenn o bed ar re habask  
rak inti a vezo galvet mibion da Zoue.
- Gwenn o bed ar re heskinet en abeg d'an eeunder  
rak riez an neñvoù a zo en o fiaou.
- Gwenn e vezo ho ped pa ho tismegor, pa ho heskinor, pa gomzor  
drouk gant gaou diwar ho penn en abeg din  
Laouenait ha bezit drant dre ma vezo bras ho kopr e-barzh an neñvo

Al lider a ziskenn diouzh an aoter, er c'hreiz, hag hec'h ezañs hag  
a gan an trinevetadur.

Doue nevet, kadarn nevet, divarvel nevet, az pezh truez ouzhimp!  
Doue nevet, kadarn nevet, divarvel nevet, fenn da garantez warnimp!  
Doue nevet, kadarn nevet, divarvel nevet, diskuilh dimp da glod!

Al lider a adro al lestr-ezañs, a bign ouzh an aoter hag a stag  
gant ar meulgan meur :

Klod da Zoue e barr an neñvoù,  
peoc'h war an tir ha madelezh d'an dud.  
Da veuliñ a reomp. Da vennigañ a reomp. Da azeuliñ a reomp.  
Da ganmeuliñ a reomp. Da drugarekaat a reomp evit da glod meur.  
Aotrou Doue, Neñvri, Doue, Tad hollc'halloudek,  
Aotrou Mab unc'hanedik, Yesous Krist,  
Aotrou Doue, oan da Zoue, Mab d'an Tad,  
te hag a zistaol pec'hedoù ar bed, az truez ouzhimp,  
te hag a zistaol pec'hedoù ar bed, degemer hor pedenn,  
te a zo ez azez ouzh tu dehoù d'an Tad, az pezh truez ouzhimp,  
rak nemedout a vefe nevet, nemedout a vefe an Aotrou,  
nemedout a vefe an uhelañ, â Yesous Krist,  
gant an Awen Nevet, evit klod Doue an Tad. Hevezet !

Al lider a dro davet an arvesterion hag a lavar :  
mar deo kargad : Ganeoc'h emañ ar peoc'h.

8.

mar deo gudaer : Ganeoc'h emañ an Aotrou.

Bez'e eilger an holl : Ha gant da Awen !

Neuze, an abostoler hag anez dezhañ, al lider, a ya d'an aspled hag a gan an aspedenn-erbediñ. Ober a reer aruez ar groaz hag en em stouiñ pa lavarer : Pedomp an Aotrou.

### ASPEDENN-ERBEDIN

An avieler :

1° Pedomp holl a greiz ene hag a greiz kalon : Aotrou hollc'halloudek, Doue hon tadoù, ni az ped, selaou ouzhiamp, az pez truez ouzhiamp.

War-lerc'h pep kinnig pedenn ez eilger an holl teir gwezh :

Aotrou, az pez truez !

2° Evit iliz nevet Doue, amañ evel er bed a-bezh, evit Doue d'he derc'hel ha d'he diwall, pedomp an Aotrou ! ---

3° Evit an eskeb feizleun, urzh keheladoù ar c'hudaerion, an aviele-  
rion e Krist, an holl gloer hag an dud holl, pedomp an Aotrou ! ---

4° Evit Breizh hor bro, evit he riezrenadur mat, evit ar gallouedoù kret :  
lezennourion, barnerion, penngadourion ha kadourion, pedomp an Aotrou ! ---

5° Evit an Aotrou hon Doue d'o skorañ, d'o ren, d'o zreiñ e breudeur  
karadeg, holl ma'z int, enebourion hag erevent, pedomp an Aotrou ! ---

6° Evit peoc'h ha bleuñvidigezh ilizoù nevet Doue, galvidigezh ar  
broadoù ha dinec'h an tadoù, hesonerezh an hollved hag unaniezh an  
goll, pedomp an Aotrou ! ---

7° Evit ar re lusket gant o c'harantez evit Doue a vev er werc'hded,  
an deoliezh hag en embleustroni, evit ar re a zo aet da guzh en di-  
gennezderioù pell, en dezerzhioù braouac'hus, er c'hoadoù teñval, er  
menezioù, er c'hevioù hag e mougevioù an douar : pedomp an Aotrou ! ---

8° Evit ar peniti nevet-mañ, e ziazezourion gwenn o bed ha peurbad  
o c'houn, evit an holl re a vev amañ, hag a ya tre gant feiz, deoliezh  
hag acn rak Doue, evit ma kavint amañ ar morc'hed gwirion ha distaol  
o fec'hedoù hag an asant d'o goulannoù, pedomp an Aotrou ! ---

9° Evit an holl re a ginnig frouezh hag a ra traoù mat en neved ke-  
helus-mañ, evit ar re a labour hag a gan ennañ, evit an dud a zo a-dro  
dimp hag a c'hortoz diganit un druez veur ha puilh, pedomp an Aotrou ! ---

10° Evit gwazed ha mitizhion Doue, menec'h, breudeur ha c'hoarezed hon  
urzh nevet hag hor c'henvreuriezhioù, o c'hresk e perzhioù, e grad-  
vat hag e niver; o gwellaenn hag o silvidigezh, pedomp an Aotrou ! ---

11° Evit an holl re o deus hon dilazet, evit na en em gollint ket, evit  
an holl re a zo ganimp bremañ evit ma kendalc'hint, hag evit an holl  
re a zo war zont evit na ray ket diouer dezhe an aerzh, pedomp an Aotrou !

12° Evit an holl re o deus pec'het bras, evit distaol o fazioù, evit ma  
vezo dezhe holl ur mervel kristen, dizoan, divezh hag un difenn kaer  
dirak lez-varn spouronus Krist, pedomp an Aotrou ! ---

13° Evit an holl dud a youl vat a glask Doue hep gellout e envel hag  
evit an holl re ivez n'e glaskont ket c'hoazh, pedomp an Aotrou ! ---

14° Evit hor c'herent, hor c'heneiled, hor madoberourion hag hon eneb-  
curion, hag evit an holl re o deus gouennet ouzhiamp, ha ni ken dizel-  
lezek, erbediñ evite, pedomp an Aotrou ! ---

15° Evit ma vezo Doue e-un difenner an intañvezed, tad an emzivadeg,  
erbed an holl re a c'houzañv eus an anken hag an argoll, ar re sammet  
gant an dilevenez hag ar c'hañv, pedomp an Aotrou ! ---

- 16° Evit ma vezo mezeg ha pare ar re c'hourvezet gant an derzhiem pe dorret gant ar c'hleñved hag evit ma eveshay ouzh penwele ar re en anken an dremenven, pedomp an Aotrou ! ---
- 17° Evit ar re zroukhoalet pe en diaester, an dleourion, ar re en drouk verz, evit m'o gweladenno, m'o c'hadarnay, ha m'o salvo an hini holl-c'halloudek, pedomp an Aotrou ! ---
- 18° Evit an ergerzherion en arvar hag o distro mat, evit ma vezo sturier ar verdeidi hag o repu er barr-amzer, pedomp an Aotrou ! ---
- 19° Evit an holl re doaniet gant an digenvezder, gant diveizidigezh o hentez, an dideneridigezh hag an digarantez, evit an holl beorien, ar geizh hag ar gantreerion didan, didoenn ha divara, pedomp an Aotrou ! ---
- 20° Evit ar brizonidi dic'hoanag e-barzh o zoullou-bac'h, evit ar re a boagn e trevelloù brevus, evit ar re a zo bet barnet d'ar mengleuzioù, ar re en harlu, er sklavelezh kalet, en trubuilhoù, en arvar pe en ez-homma, pedomp an Aotrou ! ---
- 21° Evit an dimeziñ nevet e Krist, evit ar re en em gare ha n'en em garot mui ken hag evit ar re a fell dezhe ergerzhout a-gevret hent ar beurbadelezh, pedomp an Aotrou ! ---
- 22° Evit an holl re hon eus lakaet, hoalet pe zalc'het er pec'hed dre hor c'homzoù, hon oberioù, hag hor skouerioù, evit na vezint ket laosket er-maez eus ar Riez en abeg dimp, pedomp an Aotrou ! ---
- 23° Evit ma vezo ar bec'herion troet da vat, gant Doue, ha ma ar c'hentañ anezhe, evit ma ehano an diforc'hidigezhioù-kredenn, ma pelley dalc'hder ar broadoù, ma avielo ha sklerijenno ar baganed ha ma lakay un termen ouzh emsavadegoù an disivoud, dre c'halloud an Awen Nevet, pedomp an Aotrou ! ---
- 24° Evit holl geline c'hre, evit ar re zisprizet gant an holl, evit ar re heskinet, evit ar re, ken gwan, a gouezh dalc'hmat hag a fell dezhe adsevel, evit an holl gatekizidi hag o adnevezadur, pedomp an Aotrou !
- 25° Evit frealzidigezh, distaol pec'hedoù ha koun gwenvidik hon holl dadoù ha breudeur ha mammoù ha c'hoarezed bet marvet deol, hag evit an holl gristenion oc'h ec'hoazañ nepell ac'han hag e-lec'h all, pedomp an Aotrou ! ---
- 26° Evit m'ho diwalle diouzh ar vosenn, an naonegezh hag an arnevioù diouzh an esorc'hoù, an tangwalloù hag an armoù, diouzh aloubadegoù an estren hag ar brezel dispac'hel, pedomp an Aotrou ! ---
- 27° Evit m'hon dishualo eus pep gwaskerezh, konnar, gourdrourz, arvar ha ret; evit m'hon digabestro eus pep trubuilh, eus pep droug hag eus pep glac'har, pedomp an Aotrou ! ---
- 28° Evit ma c'honezimp buhez, peoc'h, yec'hed, silvidigezh, gwarez, distaol ha pardon hor pec'hedoù, pedomp an Aotrou ! ---
- 29° Evit ma nevetay hon eneoù, ma'z ay da ziorged hor c'horfoù, da sonn hor poelladurioù ha da c'hlan hor prederioù, pedomp an Aotrou !
- 30° Evit ma vezimp kelc'hiet gant e aelez heñvel ouzh ur voger-greñv, ma tizhimp, difennet gant o skoazell ha renet gante, unded ar feiz hag anaodigezh e glod dreistdiraez, pedomp an Aotrou ! ---
- 31° Evit ma legamero, dre e gendruvez difaezhus, an holl dud e-barzh e riez goude bezañ graet anezhe mibion ar sklerijenn hag an deiz, pedomp an Aotrou !
- 32° Evit ma aotreo dimp, dre e zaioni hag e drugarez, amzerioù eurus,

10.

frouezhusted ar maezioù ha paoetegezh frouezh an douar, pedomp an Aotrou!

33° Evit ma vezo pep hini, e pep pred hag e pep lec'h, diwallet ha skoazellet, gweladennet ha benniget gant Doue, pedomp an Aotrou! ---

34° Evit ma teurvezo selaou ouzh pedenn ar bec'herion ma'zomp, ma vezo hegarat ha tener en hor c'heñver, pedomp an Aotrou! ---

35° Hor skor, hor salv, az pez truez ouzhimp hag hon diwall, â Zoue, âre da c'hras,

hag an holl a lavar, teir gwezh ha goustad kenañ :

Az pez truez, Aotrou ! Al lider a gloz :

O venegiñ hon Intron, hollnevet, hollc'hlan, hollvenniget, klodveurek, mamm da Zoue, Maria werc'hez da viken; hon aer-meur nevet Kolomban, ar re wenn o bed a Geltia vrudek; an holl sent; en em ginnigomp ni hon unan, an eil re hag ar re all, ha kinnigomp hor buhez holl, da Grist hon Doue !

Al lider a sav e zaouarn hag an holl en em stou en ur groaziañ o daouarn war o brennid. Da c'houde e tigoront anezhe hag ez astennont o divrec'h a-veskell davet an douar en ur ganañ : Dit-te, Aotrou !

Sevel a reont holl hag al lider a lavar ar youc'hadenn :

O vezañ ma'z out-te an Doue da ha kar-an-dud ha ma'z kanneulomp, Tad +, Mab hag Awen Nevet, bremañ hag hiviziken, a viskoazh da viken!

An holl a gan : Hevezet ! Hevezet ! Hevezet !

Al lider a sav e zaouarn hag a gan ar bedenn-mañ :

Pedomp : Aotrou, te hag a aotreas dimp kinnig dit hon aspedennoù, hag a c'hrataas d'an daou pe dri bodet ez anv, seveniñ o fedennoù, klev bremañ, hervez da c'houestl, goulennoù da vevelion, ro dezhe, en amzer-mañ, da anavezout da wirionez, hag er bed dazont, ar vuhez peurbad. Dre Yesous Krist, da grouadur muiañ-karet, dezhañ ra vezo, a-unan ganit-te Dad dizerou, ha sant da Awen bevaer ha da, pep bri ha pep klod, a viskoazh da viken !

Filgeriañ a reer : Hevezet !

Evelse e vez graet ivez war-ler'h pedennoù al lidaoueg amzeriadet pe al lidaoueg santadel. Da c'houde, an abostoler pe ul lenner a gan abostol an deiz. Ar c'hor a gan ar grazal ha, ma n'eus ket anezhañ, ezañsador an avielaouer.

Bev hag efedus eo lavar Doue, lemmoc'h eget nep kleze divvalvennek, trebarzhed betek disrannañ ene ha spered, melloù ha meloù ha prederioù ar galon. Krouadur ebet ne chom kuzhet dirazañ, noazh ha dizolo eo pep tra dirak lagad an Hini a rankomp reiñ kred dezhañ !

Neuze an avieler, pe, anez dezhañ, al lider, a gemer an avielaouer.

Ober a reer lidkerzh an aviel, pe donedigezh vihan : Ouzh penn an ambrougaded emañ an douger-ezañs; war e heul, an dougerion-biled, an avieler o tougen an avielaouer dirak e zaoulagad, al lider hag ar gevliderion all. Kanañ a reont ar pennadoù-mañ :

Ur gleuzeur dirak va zreid eo da lavar

Ur sklerijenn war va rañved !

1° N'ho tilezin ket emzivat; dont a rin betek ennoc'h, ur pennadig amzer c'hoazh hag ar bed n'am gwelo mui, hogen c'hwi am gwelo, peogwir e vevan hag e vevot ivez.

2° Nep piv bennak am c'har a zalc'ho va ger ha'm Zad e garo. Dont a raimp betek enrañ hag ober hon annez annañ.

3° Nep piv bennak n'am c'har ket ne zalc'h ket va ger. Hag ar ger a glevit, diganin nend eo ket, hogen digant va Zad en deus va c'haset.

4° Ar skod-gwini gwirion en-me, hag ar gwiniennet eo va Zad; glan oc'h c'hwi endeo en abeg d'ar ger am eus diouganet deoc'h. Chomit ennon hag e chomin ennoc'h.

5° Ar skod-gwini on me, ar c'hoad-gwini oc'h c'hwi. An neb a chom ennon hag a choman ennañ a zoug kalz a frouezh, rak hepdon ne c'hellit ober netra.

6° Mar chomit ennon ha mar chom va ger ennoc'h, goulennit a gerot hag e vezo roet deoc'h.

7° Evel m'am c'haras an Tad, ho karet am eus. Chomit em c'harantez. An traoù-se am eus lavaret deoc'h ma vezo ul levenez ennoc'h ha ma vezo peurvat ho levenez.

8° Sed amañ va c'hemenn : En em garit an eil re hag ar re all evel m'am eus ho karet. N'eus ket a garantez vrasoc'h eget reiñ e vuhez e vit e geneiled. Va c'heneiled oc'h-c'hwi pa rit a gemennan deoc'h.

9° Pa vezo degouezhet ar Frealzer, an Awen a Wirionez, ho pleniañ a ray er wirionez a-bezh, peogwir ne gomzo ket diwar e benn, hogen e lavaro pep tra en devo klevet.

10° Da c'her am eus roet dezhe, hag ar bed en deus o c'hasaet dre ma n'int ket eus ar bed. O neveta dre'z kwirionez : ar wirionez eo da c'her. Pa zeuer e-barzh an neved e kaner an diwezhañ Allelouyah !

An avieler a laka an avielaouer war ar marc'h-levr pe war dacuarn an abostoler hag a lavar : Ganeoc'h emañ an Aotrou !

Bez'ez eilgerier : Ha gant da Awen !

Ober a ra teir arouez-kroaz gant ar biz-meud war e dal, war e ziweuz ha war e vrennid.

Heuliad + an Aviel nevet hervez (Mazhe, Mark, Lukaz, Yann) !

Bez'ez eilgerier en ur ober arouez ar groaz. Klod dit, Aotrou !

Bez'e kaner an aviel. En diwez e kaner, tra m'emañ al lider oc'h astenn an avielaouer war an arvesterion : Meuleudi dit, â Grist !

Al lider a vennig teir gwezh an arvesterion hag ur wezh an aoter gant an avielaouer hag a lavar :

Dre an aviel nevet-mañ, ra vezo gwalc'het + hon holl bec'hedoù, pareet + hon holl gleñvedoù, frealzet + hon holl boanioù ha kaset da get + pep galloud aerouant !

Bez'ez eilgerier : Hevezet !

#### KINNIG AR GREDENNOURION

Bez'ez embann an avieler :

Kehelit an Aotrou gant ho terc'hvoud ha preveudioù ho leve. Na ankounac'hait ket ober ar mad ha reiñ, rak hevelep aberzhoù a blij da Zoue. M'hoc'h eus koun, dirak an aoter, ho pout nep droug bennak a-enep ho preur, dilezit ho kinnigadenn dirak an aoter, kit da gentañ en em adunvaniñ gant ho preur, ha da c'houde e teuot endro lidkinnigañ ouzh an aoter.

#### POK AR PEOC'H

Al lider a vennig an arvesterion gant ar groaz nevet hag a lavar :  
Peoc'h an Aotrou ra vezo ganeoc'h da viken !

Bez'ez eilgerier : Ha gant da Awen !



B- / G O U R S E Z E U K A R I S T E LDARBARIDIGEZH

Pa zeuer dirak aoter an darbaridigezh e kevarc'her; bez'e tosta an a-  
vieter; emân an oferidi all a-dreñv dezhañ. Bez'e vennig ar c'hudas-  
rion en ul lavarout :

+ Gwenn o bed ar re bedet da vanvez-eured an Oan !

An avieler a zarbar ar bara hag a lavar :

Heñvel ouzh an danvadez a gaser d'ar voserez...

Bez'ez eilger an oferidi : ... ne zigor ket e c'henoù.

an avieler : Hag evel ma'z eo mut an oan dirak an touzer...

an oferidi : e tav.

An avieler a skuilh ar gwin hag an dour : Diouzh e du dehoù e stril-  
has gwad ha dour...

An oferidi : Hag an hini her gwelas a destenias, hag e ouzomp ez eo  
gwir e desteni.

An avieler a ya war an tu dehoù; al lider a dosta hag a lavar en ur  
sevel e zaouarn :

A Zoue, teurvez sellout ouzhimp hag eveshaat ouzh hon aberzh, hag e  
zegemerout da vat evel ma rejout gwezhall evit roadoù Hebel, ostivoù  
Noah, loskaberzhoù Abraham, kinnig Malkisedek, aberzhoù Mocheh, Aaron  
na Samuel, rak ar bara a rannomp, kib ar gwin hag an dour kemmesket  
a vennigomp, en Anv + an Tad, hag + ar Mab, hag an + Awen Nevet.

Bez'ez eilger an holl : Hevezet !

An avieler a c'holo ar gouestloù gant o gouelioù, al lider a laka ar  
c'hourgouel hag a ezañs tra ma kaner :

an Oan a zo bet lidlazhet a zo dellezek a zegemerout ar galloud hag  
ar binvidigezh, ar furnezh hag an nerzh, ar bri, ar c'hlod hag ar  
veuleudi a viskoazh da viken. Hevezet.

En em stouñ a ra an holl ha lavarout :

Uvel hor spered ha keuziek hor c'halon, ra vezimp degemeret ganit,  
Aotrou, ra vezo hon aberzh kaset da benn hiziv en doare ma vezo del-  
lezek a blijout dit, â Aotrou, hon Doue !

Sevel a ra an holl hag ober lidkerzh ar roadoù nevet, pe donedigezh  
vras. Kanañ a ra ar c'hor, goustad-kenañ ha boud, ar c'herubeg pe  
meulgan ar gerubed.

Ni hag a zalc'h er rin lec'h ar gerubed, a gan d'an Dreinded vevaer  
ar meulgan nevet teir gwezh. D'ar pred nevet-mañ e tigargomp (bez'e  
tigarger ar roadoù nevet war an aoter) pep preder douarel, ez ankou-  
nac'haomp an arnoù tremenet hag e tegemomp ar bedri embrouget di-  
welus gant luez an aelez : allelouyah ! allelouyah ! allelouyah !

Tra ma kaner, al lider en deus ezañset ar c'hinnigadur gant teir  
c'hroaz a voged, an aoter hag an oferidi gant tri c'helc'h a voged. An  
avieler a ezañs an arvesterion, al lider en em dro davete hag a lavar:  
Ganeoc'h emañ an Aotrou !

Eilger : Ha gant da Awen !

Lider : Unanet gant ar garantez, ra embanno hor c'halonoù hag hor  
genaouioù ar feiz en Tad, er Mab hag en Awen Nevet, Treinded ken-  
zerc'hvoudel, Unded anrannadus.

14.

An holl a gan ar gredenn :

Krediñ a ran en Doue nemetañ, Tad hollc'halloudek,  
salver an neñv hag an tir, pep tra gweladus hag anweladus,  
hag en Aotrou nemetañ, Yesous Krist, mab unc'haneñk da Zoue,  
ganet eus an Tad araok an holl gantvedoù, Doue a Zoue,  
Goulou a c'houlou, Doue gwirion a Zoue gwirion,  
engehentet, nann-krouet, kenzerc'hvoudel gant an Tad;  
a voe pep tra graet gantañ, (war an daoulin)  
a ziskennas diouzh an neñvoù,  
evidomp-ni bediz, hag evit hor silvidigezh,  
a enkorfas dre an Awen Nevet ha Maria ar Werc'hez,  
hag en em eure den; (sevel a reer)  
a voe kroazstaget evidomp dindan Pontius Pilatus,  
a c'houzañvas hag a voe sebeliet,  
hag a zasorc'has d'an trede deiz hervez ar skriturioù;  
hag a bignas en neñvoù, m'emañ azezet enne en tu dehou d'an Tad,  
a zeuy endro kloveurek da varn ar re vev hag ar re varv,  
n'en devezo diwez ebet e ren; hag en Awen Nevet,  
Aotrou bevaer, a darzh eus an Tad,  
a ze azeulet ha kanmeulet a-unan gant an Tad hag ar Mab,  
a gomzas dre an diouganerion;  
hag en Iliz, unan, nevet, hollvedel hag abostolel;  
emañ a ran ur badeziant nemetañ, evit distaol ar pec'hedoù;  
gortoz a ran dasorc'hidigezh ar re varv +  
ha buhez ar c'hantved dazont. Hevezet !

Dre na lenner an divdaolennoù, al lider a zizolo ar gouelioù : an  
avieler a lenn an divdaolennoù :

1° E koun kehelus eus an Aerion Adam, Hebel ha C'Hanok, Noah, Abra-  
ham ha Malkisedek, Isaak, Jagu ha Jozeb, Mocheh kile Doue hag Aharon,  
Dewi ha Salomon, hag hendadoù an Aotrou,

War lerc'h pep kounadur e kan an holl : Dalc'h koun, Aotrou !

2° E koun kehelus eus an diouganerion, Samuel, Eliah hag Elizayah,  
Isaiah, Jeremiah; Ezech'hie! ha Daniel, Amos, Osayah hag an holl diouga-  
nerion ---

3° E koun kehelus eus Ana, Yorez Vreizh ha Yoakim he fried, Yann an  
diouganour, diaraoger ha badezour ---

4° E kenunaniezh ivez gant Maria gloñveurek, mamm da Yesous Krist,  
hon Doue, hon Aotrou hag hor Salver ---

5° E koun kehelus eus an ebestel nevet : Per ha Paol, Andrev, Jakez,  
Yann, Tomaz, Jakez, Fulup, Bertele, Mazhe, Simon ha Tadeaz, Mazheas  
ha Barnabas, Mark ha Lukaz, ar c'hentverzher Stefan hag an holl e-  
bestel hag avielerion ha diskibled an Aotrou ---

6° E koun kehelus eus Jozeb eus Arimataña, eus an eskeb diazezerion  
Geltia, Aristoboulos ha Padrig, Samzun, Tudual ha Padern, Brieg,  
Kaourintin ha Maloù, Kler, Amand, melani ha Dolieg ---

7° E koun kehelus eus hon tadoù, leoned ha douezougerion, embleus-  
trerion ha mistri speredel : Paol, Anton, ha Pakom, maker, Efrem ha  
Kassian, Koulm ha Kolomban, hon Tad ---

8° E koun kehelus eus hor mammoù en embleustrerazh : Maria Eift,  
Katell ha Pelagia, Marc'harid ha Brec'hed, Elena, Ursula fa Fara,

Azenor, Gwenn hag Onenn ---

9° E koun kehelus eus ebed ha menec'h Keltia vuzek : Gwennaël ha Gweno-  
le, Gweltaz ha Gurvan, Kenwion ha Ronan, Herve, Ildud, Riwal ha Jagu  
hag an holl sent ---

10° E koun hag evit arsav ar re a yeas en hor raok dindan siel ar feiz  
N... N..., hor c'herent, keneiled, madoberourion hag erevent aet da a-  
naon, re varv ar brezel, ar re na bed den ebet evite, ra roy dezhe an  
Aotrou hon Doue un ode e bed an distan hag ar peoc'h, ma luc'hed ernañ  
sklerijenn e zremm ---

11° E koun hag evit silvidigezh ar Sez holldirel nevet, goursez nevet  
ar C'Hornog, an Aerion feizleun, hon arc'heskob N..., hon eskob Tudual,  
an eskeb, ar c'hudaerion, an avielerion hag an oferidi gevlider, gwa-  
zed ha mitizhion Doue N... NNN hag an holl glañvourion hag an holl re  
a ouel hag an holl re a zic'hoanag, a c'houzañv hag a varv, hag an  
holl re a zo enskrivet amañ o anvoù hag an holl re a vank o anvoù a  
anavez Doue anezhe. N'o enskrivo holl witibunan war levr ar Vuhez !---

Pedenn ar ginnigadenn hollek, astennet eo an daouarn.

Doue hollec'halloudek, hon Tad neñvel, ni a ginnig dit hag a ziskouez  
dirazout ar bara + -mañ hag ar gibad a win hag a zour kemmesket +, a-  
gevret ganimp-ni, hon eneoù hag hor c'horfoù, ni + en em ouestl d'az  
kwazoni nevet, ni en em engouestl da sentin hiviziken ouzh da youl  
hollnevet, ouzh da gemenoù doueel, ni az asped kas diamp da Awen Nevet  
evitañ da zistrujañ ennomp, heñvel ouzh un tantad loskus, pep tra a  
zisplij dit, en doare ma c'hellimp en em reiñ dit, evel un aberzh bev,  
nevet ha degemeradus, ar pezh a zo hor gwazoni eeun. Ni az ped, sell  
ouzh feiz ha pedenoù da Iliz, na damall ket d'az tud na d'az mevel  
(stouañ a ra hag ober arouez ar groaz) + o lidañ dirazout o fec'hadoù  
(adsevel a ra hag astenn an daouarn) hogen kadarna hag efedusa e c'he-  
rioù hag e oberoù peurc'hraet ez Anv, evit sentin ouzh da gemenn hag  
hervez da youl; ha daoust ma'z omp dizellezek a ginnig dit un aberzh,  
ni az asped (stouadenn ha daouarn war an aoter) kavout mat ar wazonezh-  
mañ a zleomp dit hag aotren (ober a ra teir gwezh arouez ar groaz) diamp  
pinvidigezhioù da zaioni, nerzh da c'halloudezh, ha levez da vennozh  
(klozañ a ra adarre e zaouarn). Dre Yesous Krist, da Vab hag hon Aotrou,  
a zo ganit hag an Awen Nevet un Doue unik, dezhañ ra vezo pep bri ha  
pep klod a viskoazh da viken.

An holl : Hevezet !

### REOL

Trema an arvesterion :

Ganeoc'h emañ an Aotrou

Ha gant da Awen.

Savomp hor c'halonoù ! (Sevel a ra e zaouarn)

Ni hon eus anezhe trema an Aotrou !

(trema an aoter) Trugarekaomp an Aotrou, hon Doue ! (stouadenn)

Da eo hag eeun ! (adsevel a ra.)

### RAGIENN

En wir, da hag eeun eo, reizh ha salvus, da vauliñ ha'z kanneuliñ, da  
drugarekaat e pep tra, evit pep tra, evit pep hini, e pep pred hag e  
pep lec'h, Aotrou nevet, Tad hollec'halloudek, Doue peurbad... (kanañ  
a ra skrid al lidaoueg amzeriadell, anez dezhañ ez a war raok)... dre

16.

Yesous Krist hon Aotrou. Evit se ez kanmeulomp ha'z meulomp, Doue holl-  
c'halloudek, neñvri, hag ez azeulomp da anv koldveurek, Anv an Tad +  
hag ar Mab + hag an Awen Nevet +. Oc'h unaniñ hor mouezhioù gant lid-  
genenn an Aelez hag an Arc'haelez, an Droned hag an Aotrouniezhed, ar  
deued hag ar Berzhied, ar C'Halloudezhied hag holl degemeridi an  
neñvoù, ar Gerubed hag ar Serafed, dirak da gador veur e kanomp hep ehan:

Trinevetadur (stouet)

Nebet, nevet, nevet eo an Aotrou, Doue al luez; leun eo an neñvoù  
hag an tir eus da glod. Hoshannah e barr an neñvoù. (Sevel a ra ha +)  
Benniget ra vezo an Hini a zeu en Anv an Aotrou. Hoshannah e barr an  
neñvoù! (Andaouarn astennet): Nevet en wir, benniget en wir eo da  
Vab hag hon Aotrou Yesous Krist, Ger krouer hag Aotrou meurdeus a  
ziskennas eus an neñv hag en em eure den. (An daouarn astennet war  
ar c'hinnig;) Leugn ivez an aberzh-mañ gant da glod, da c'halloudezh  
ha'z tonedigezh (daouarn war an aoter), ra gavo dit ez eo ar gouestl-  
mañ + kinniget, +aotreet, +reizh ha degemeradus, evel arouez (+ war  
ar bara) korf (+ war ar gib) ha gwad Yesous Krist, hon Aotrou.

Ensavadurezh

En noz ma voe gwerzhet, o peurluniañ e garout evidomp,  
eñ a gemeras bara, hag o vezañ trugarekaet, (stouiñ a ra e benn) e +  
vennigas, e rannas hag e roas d'an ebestel ha diskibled en ul lava-  
rout: (stouiñ a ra war ar bara) KEMERIT, DEBRIT, AN DRA-MAN EO VA  
C'HORF A ZO FREUZHET EVIDOC'H HAG EVIT E-LEIZH A DUD.  
Grit evelhen e koun ac'hanon. (Bez'ez en em stouer don, hag an dud a  
eilger: Hevezet !)

En hevelep doare, goude koan, o kregiñ er gib (kemer a ra ar gib en  
e zaouarn) e trugarekaas, he + bennigas hag he roas dezhe en ul la-  
varout: (stouiñ a ra war ar gib) EVIT ANEZHI HOLL: AN DRA-MAN EO  
VA GWAD. AR GIB-MAN A ZO AR C'HEVREDAD NEVEZ EM GWAD A ZO SKUILHET  
EVIDOC'H HAG EVIT E-LEIZH A DUD DA ZISTEUREL AR PEC'HEDOU.  
Grit evelhen e koun ac'hanon bewezh ma evot anezhi. (An holl a stou)  
Bep tro ma tebrot ar bara-mañ ha ma evot diouzh ar gib, ez embannot  
marv an Aotrou (sevel a reont ha +) betek ma teuy endro eus an neñv +  
en e hollgaarded.

Bez'ez eilgerier: Hevezet !

Kounadur

UHELIDIGEZH AR C'HANT HAG AR GIB pe KINNIGIDIGEZH VEUR

Rak-se, ã Dad karantezleun, ni da wazed, o terc'hel koun eus aberzh  
nevet da Vab, o testenianñ e varv, o laouenaat eus e zasorc'hidigezh  
c'halloudus, eus e bignidigezh trec'hlied, eus e sezadur klodveu-  
rek ouzh da du dehou, o c'hortoz goanag benniget e emziskouezidigezh  
hag e zistro, ni a ginnig dit an aberzh reizh ha diwad-mañ ac'h eus  
ensavet ez iliz (lakaat a ra ar c'hinnig war an aoter) ha ni az ped,  
gra ma vezo douget war da aoter dreist da vout kinniget warnezhi  
gant an Hini na baouez ket a erbediñ evidomp evel Gadaer meur ha  
peurbad, heñvel ouzh an oan lidlazhet, abaoe derou ar bed. Hag o vout  
m'ac'h eus kemennet e vezo ar rin neñvel peurc'hraet dre-mañ dre  
hantererezh bediz, teurvez sellout ouzh ar c'hinnigoù nevet-mañ,  
gant un dremm mistr ha seder, hag o degemerout war da aoter dirak  
da gador veur klodveurek en neñvoù.

Adsevel a ra, oc'h astenn uhel an daouarn.

Aspedenn

Ni az-ped hag a asped uvel da veurdez, teurvez degas warnomp ha war ar roadoù-mañ glizh da Awen Nevet (oc'h astenn e zaouarn war ar ginnigadenn) evitañ d'o goleiñ gant e c'halloudezh hag evidout d'o diskouez, dre e hantererezh, evel (+ war ar bara) korf-sakr ha (+ war ar gib) gwad prizius Yesous Krist, da Vab hag hon Aotrou (+ war ar ginnigadenn en he fezh) kemmet gant da Awen Nevet (daouarn astennet) ha deut da vout ar ginnigadenn nevet ha glan ha kloveurek, evit nevetadur an eneoù ha pareañs ar c'horfoù evit buhez hep diskar ha salv peurbad ar re a zebr anezhañ hag a ev diouti.

Diskenn a ra a-rekin o stouiñ teir gwezh. In holl a lavar :

Hevezet ! Hevezet ! Hevezet !

Ouzh traoñ d'an aoter e lavar al lider :

Emañ an Aotrou en e neved, tavet an tir a-bezh dirazañ.

An-holl en em stou, e zalc'hozh an daouarn hag a, azeul, Goude ma tavet sav an holl. Degemerout a ra al lider al lestr-ezañs hag ezañs fi teir gwezh ar ginnigadenn nevet en ul lavarout .

Sell pizh, â Dad ar gouleier hag ar frealzidigezh, ouzh (/) an aberzh-mañ lidet war ar groaz ur wezh evit an holl wezhioù, evel (/) un aberzh klok ha gwalc'hek, ur ginnigadenn (/) hag ur sevenidigezh leun evit pec'hedoù an tir a-bezh (Daskoriñ a ra al lestr-ezañs, pignout ouzh an aoter ha kenderc'hel e zaouarn astennet) hag aotre dimp ha d'an dud en he fezh, holl vadoberoù gouzañvadenn da Vab maiañ-karet ac'h eus lakaet ennañ da vourusted holl, distaol hon holl bec'hedoù hag ar vuhez peurbad. Kement-se, â Aotrou, a glaskomp evit an holl re a vev kenunanet gant da Iliz nevet, hag i bev ha marv, hag evit an holl re hag az aspeder evite e kinnigomp (klozañ a ra e zaouarn hag ober arouez ar groaz war ar ginnigadenn ha lavarout :) an aberzh-mañ hag e tiskouezomp dit hor pedemoù.

An holl a eilger : Hevezet !

Youc'hadenn veur

Sevel a ra e zaouarn a-us d'e benn.

Degemer hon holl c'houlennoù, ha difrae, â Zoue, ar pred ma kasi diourn da du dehoù an Hini a fello dit e zegas; pa zeuy a-wel e tasorc'ho an holl re varv hag e vezimp, ni ar re vev, dilamet da gejañ gantañ ha da viken e vezimp gantañ.

Didan ouel an traoù trel, emamp bremañ o kenunaniñ gantañ, met pa vezo dioueliet hon dremm ez arvestimp outañ, o laouenaat eus e glod, tost outañ en e glod, ha, drezañ, ni a vezo a-unan gant da Iliz nevet ha dinamm, en ul levenez dreist dirak da glod.

Bennozh alvezel

Klozañ a ra adarre e zaouarn.

Salaou, â Dad neñvel, dre garantez evitañ, (Kemer a ra ar c'horf nevet en e zorn dehoù hag e sevel a-us d'ar gib a zalc'h en e zorn kleiz) Yesous Krist, da Vab, â Aotrou, (treiñ a ra davet ar reter, e vennigañ ha lavarout:) a nevetaez drezañ, (davet ar c'hreisteiz) a vevaez drezañ, (davet ar c'hornog) a vennigez dalc'huat drezañ, (davet ar c'hreisteiz hag an aoter) a roez dimp drezañ an holl vadbez-mañ. (Lakaet a ra ar gib war an aoter hag ober warnoc'hi arouez ar groaz gant

18.

ar c'horf nevet.) Rak drezañ, ha +gantañ, hag +ennañ eo, â Dad +holl c'halloudek, en unded +an Awen Nevet, e vez roet dit pep bri ha pep klod, bremañ hag hiviziken, a viskoazh da viken.

Lakaat a ra ar ginnigadenn nevet, bez'ez eilger an holl : Hevezet !  
Stouet e lavar al lider : Hag o vezañ ne ouzomp ket pediñ, gant da ziskibled e c'houlennomp ouzhit en ur aspediñ : (sevel a ra) Aotrou, kelenn dimp penaos e pedimp hag e lavariimp :

#### Pedenn an Aotrou

kanet gant an holl, an daouarn astennet :

Hon Tad a zo en neñv, bezet nevet aet da Anv, deuet da riez,  
bezet graet da youl war an tir evel en neñv,  
ro dimp hiziv hor bara pemdeziek,  
distao, hon dleoù evel m'o distaolomp d'hon dleourion,  
n'hol laka ket en arnod, hogen hon dishual diouzh an aerouant,  
(klozañ a ra e zaouarn hag ober arouez ar groaz ha lavarout)  
rak dit-te, â Dad, +gant da Vab hag an Awen Nevet, ra vezo pep bri ha  
pep klod ha pep galloudezh, bremañ hag hiviziken, a viskoazh da vi-  
ken. Hevezet !

Lavarout a ra an avieler : Stouit ho penn dirak an Aotrou !

An holl en em stou hag a lavar : Dirazout, Aotrou !

Al lider, stouet, e zaouarn unanet war an aoter, a lavar :

Pedomp! A Dad a skleri-jenn, oc'h ober da annez e-touesk ar Gerubed  
hag o sellout avat an traoù dre-mañ, luc'hed, en hollgaerder da glod  
hag e birvidigezh da garantez, warnomp-ni a stou hor penn dirazout.  
Hon nevet, ni az asped, dre da c'halloudezh neñvel, evidomp da chemel  
hiviziken ha da viken ennañ tra ma chomo ennomp, pa gemeromp perzh  
ez deol e rinoù glan ha bevaer korf sakr ha gwad prizius da Vab muiañ-  
karet. Aotre dimp e c'hellimp, oc'h anavezout bepred e vezañs, diaezhen-  
nañ frond ur vuhez nevet ha degemerout digant da vrokusted yec'hed  
ar c'horf hag hini an ene, e kenunaniezh gant da lliz ez eus anezhi  
korf rinel da Grist, leunder an Hini a leugn pep tra e pep hini.

Bez'ez eilger an holl : Hevezet !

Sevel a ra al lider ar c'horf nevet a-us d'ar gib ha lavarout :

An traoù nevet d'ar re nevet !

Meurdeus e sav ar ginnigadenn nevet tra ma kan an holl :

Un hini nevet hepken ez eus, un aotrou hepken, Yesous Krist, m'ema-  
omp ennañ dre an Awen Nevet evit klod an Tad. Hevezet !

#### Rannadur

Lakaat a ra al lider ar ginnigadenn nevet war an aoter ha rannañ ar  
c'horf nevet ha lavarout : Evelhen, en wir, // e c'houzañvas ger  
Doue en e gig hag e voe // rannet war ar groaz (gant ar rannig e ra  
teir gwezh arouez ar groaz hag e soub anezhi e-barzh ar gib en ul  
lavarout;) hag e tasorc'has +d'an trede deiz +hag un Emmanuel +eo.

#### Emelladur

Peogwir emañ ennañ an Doue hag an den ur C'Hrist hepken !

An holl a eilger : Hevezet ! En em dreññ a ra al lider davet an  
tud en doare ma weler ar ginnigadenn nevet ha lavarout :

Lidlañhet eb bet ar C'Hrist, hor pask, ha rak-se e lidomp ar gouel,  
neket, gant goell kozh, na gant goell a falloni hag a zrougiezh, hogen  
gant bara-kan an eeuned hag ar wirionez.

O tiskouez ar ginnigadenn nevet gant tri biz an dorn dehou e lavar :  
 Sed amañ can Doue.

En em dreiñ a ra endro davet an aoter hag an holl da ganañ teir gwezh;  
 Can Doue a lamm pec'hedoù ar bed, az pezh truez ouzhimp !

An holl, stouet, a lavar a vouezh vout :

Krediñ a ran, Aotrou, hag embann ez out en wir ar C'Hrist, Mab d'an Doue bev, ez out deut er bed-mañ evit salviñ ar bec'hourion, ha me ar c'hentañ anezhe, Krediñ a ran ivez ez eo se da gorf dinamm ha'z kwad prizius. Me az ped,enta, distaol va holl bec'hedoù, gra ma vezin dellezek a gemerout perzh hep kondaonidigezh ez rinoù dinamm evit distaol va fec'hedoù pare va ene ha'm c'horf hag ar vuhez peurbad. Hevezet !

#### Pask

Sakramantiñ a ra al lider ha lavarout :

+ Korf sakr hon Aotrou Doue ha Salver Yesous Krist a zo roet din N... eskob (pe gudaer, pe avieler) dizellezek evit distaol va fec'hedoù, pare va ene ha'm c'horf hag ar vuhez peurbad. Hevezet !

Da c'houde ez ev teir gwezh ouzh ar gib hag a lavar :

Gwad prizius dreist hon Aotrou Doue ha Salver Yesous Krist a zo roet din N... eskob (pe gudaer pe avieler) dizellezek evit distaol va fec'hedoù, pare va ene ha'm c'horf hag ar vuhez peurbad, en Anv an Tad (evañ a ra ar c'hentañ gouzougad) hag ar Mab (an eil hini) hag an Awen Nevet (an trede hini). Hevezet !

En em dreiñ a ra davet an dud ha kanañ teir gwezh :

A Aotrou, n'on ket dellezek e teufes e-barzh va zi, met lavar ur ger hepken hag a vezo pareet va ene, hogen, Aotrou, n'on ket dellezek.

Reiñ a ra ar pask d'ar gredennourion ha lavarout :

+ Korf ha gwad hon Aotrou Doue ha Salver Yesous Krist a zo roet da waz Doue N... (pe da vatezh Doue N...) evit distaol e bec'hedoù (pe he fec'hedoù), pare e ene (pe hec'h ene) hag e gorf (pe e c'horf) hag ar vuhez peurbad. Hevezet !

E-pad ar pask e kan ar c'hor

#### Troiadennoù ar Pask

ma azlavarer war-lerc'h pep hini anezhe : Tañvit ha gwellit pegen kuñv eo an Aotrou.

1° Ar bara a vuhez on-me. An neb a zeu davidon n'en devezo naon biken hag an neb a gred annon n'en devezo sec'hei biken. ---

2° Pep tra a ro din an Tad a zeu davidon ha ne lakain ket er maez an neb a zeu davidon, peogwir e tiskennis eus an neñv neket evit ober va youl hogen youl an hini an c'hasas. ---

3° Youl an hini an c'hasas eo na gollfen tra ebet eus ar pezh en deus roet din, hogen m'e zasorc'hfen d'an deiz diwezhañ. ---

4° En wir, en wir hel lavaran deoc'h, an neb a gred annon a zo en e biaoù ar vuhez peurbad. Bara ar vuhez on-me. Ho tadoù o deus debret mann en dezerzh hag inti a zo marv. ---

5° Amañ emañ ar bara eus an neñv evit na varvo ket an neb a zebro anezhañ. Ar bara bev on-me diskennet eus an neñv.

6° An neb a zebro eus ar bara-mañ a vevo da viken, hag ar bara a roin, va c'hig eo a roin evit buhez ar bed. ---

7° En wir, en wir hel lavaran deoc'h, ma ne zebrit ket kig Mab an Den ha ma ne evit ket e wad, n'ho pezo ket ar vuhez ennoc'h. ---

8° An neb a zebr va c'hig hag a ev va gwad en deus ar vuhez peurbad hag e zasorc'hin d'an deiz diwezhañ. ---

20.

9° Rak va c'hig a zo ur boued en wir ha'm gwad a zo ur braoued en wir.  
An neb a zebr va c'hig hag a ev va gwad a chom ennon hag e choman ennañ.

10° Evel m'en deus va c'haset an Tad a zo bev, ha ma vevan drezañ,  
evelhen e vevo drezon an neb am debr. ---

11° N'eo ket evel evit ho tadoù o deus debret ar mann hag a zo marv ;  
an neb a zebr ar bara-mañ, henneth a vevo da viken. ---

Pa vez echu pep tra, al lider a sav ar gib hag a ra arouez ar groaz  
ganti war an aoter en ul lavarout :

Aotrou, davet piv ez afemp? Komzoù ar vuhez peurbed a zo ganit, ha +  
kredet hon eus, hag anavezet hon eus ez out-te ar C'Hrist Hini nevet  
Doue. Bez'ez eilger an holl : Hevezet !

An avieler a zegemer ar gib hag ar c'hant goloet gant ar gouelioù hag  
o doug war aoter an darbaridigezh m'o glana warnezhi, tra ma kan al  
lider: Padomp! Doue hollc'halloudek, da drugarekaat a reomp birvidik  
dre m'ac'h eus teurvezet hor mezur bremañ gant magadur speredel ar  
c'horf sakr hag hon dourañ gant braoued dreistlavar gwad prizijs da  
Vab unc'hanedik, Yesous Krist hon Aotrou. Da aspediñ a reomp gante: eeuna  
hon hentoù, hor c'hadarna en aon razout, hon diwall er vuhez-mañ,  
hon dihan d'an deiz diwezhañ, evit ma vezimp e pep pred ha bopred  
gwriziennet ha diazezet er garantez en doare ma q'hellimp gant an  
holl sent meizañ led, hed, uhelder ha donder ar rin-mañ hag anavezout  
karantez Yesous Krist a zo dreist pep gouiziegezh, evit ma vezimp  
leuniet hervez da glokteñ, & Zoue, dit a-unan gant da Vab hag an A-  
wen Nevet, ra vezo pep bri ha pep klod, a viskoazh da viken.

Bez'ez eilger an holl : Hevezet !

En em dreññ a ra al lider davet an arvesterion ha lavarout :

Lider : Ganeoc'h emañ an Aotrou ! Holl : Ha gant da Awen !

Lider : Kit e peoc'h ! Holl : Trugarekaomp Doue !

Al lider, o sevel e zaouarn : Bezet Hevoud an Doue hollc'halloudek+  
an Tad, ar Mab hag an Awen Nevet, warnoc'h ha war ho re,  
war ho tiez ha war hoc'h embregerezhioù da, ha chomet warnezhe da  
viken! An holl : Hevezet ! Evelhen a vennig an eskob :

Eskob : Benniget ra vezo anv an Aotrou, Holl: Bremañ ha da viken !

Eskob: Emañ hor skor en anv an Aotrou, Holl: A eure an neñv hag an tir.

Lider: R'ho pennigo an Doue hollc'halloudek, An Tad, ar Mab, hag an  
Awen + Nevet. Holl : Hevezet !

Ar gloer en em renk ouzh traoñ d'an aoter tra ma kan ar c'hor :

Keneloù, meulit holl an Aotrou Tudou e veulit holl,

Rak e drugarez en em astennas warnomp

ra chomo da viken gwirionez an Aotrou. An holl en em stou.

Klod d'an Tad, d'ar Mab ha d'an Awen Nevet. Sevel a reont ha kuit.

Evel ma oa er penn-kentañ, ha bremañ hag hiviziken,  
a viskoazh da viken. Hevezet !

+++++

AMIS B. R., SOUTENEZ CEUX QUI NOUS SOUTIENNENT.

H. DANIGO, 26, Av. de la France-Libre, KERFEUTEUN (Finistère).

# BOUQUINISTE

ACHAT

— VENTE

LISTES MENSUELLES  
D'OUVRAGES ÉPUIÉS

BRETAGNE et VARIA

SERVICE GRATUIT SUR DEMANDE

## AR SONER

LA REVUE DU FOLKLORE VIVANT DE BRETAGNE

P. MONJARRET

18, bd Joffre — LORIENT

Abonnement 1 an : 1.000 frs

C. C. P. NANTES 1435-15.

## L'EUROPE RÉELLE

Périodique de Combat pour un  
Nouvel Ordre Européen

Roland CAVALIER

31, Cité d'Antin — PARIS (9.)

1 an : 400 frs. C. C. P. 11.597-80 - PARIS

## L'ASSAUT

DES JEUNES ET DU PEUPLE

Mouvement National Communiste.

Jacques VEICLE — B.P. 29-09

PARIS (9.), France

## TOUTES LES PLAQUES GRAVÉES ET ÉMAILLÉES

CARTES DE VISITE GRAVÉES — POINÇONS — CACHETS CIRE

Le spécialiste de la plaque en plexigravure

## MAISON G. SICOT

2, RUE EDITH-CAVELL

GRAVEUR

RENNES

TIMBRES EN CAOUTCHOUC  
ET EN CUIVRE

LA BRETAGNE AVAIT MIS DE LA BEAUTÉ PARTOUT...

POUR SAUVER NOS CHAPELLES

*Lisez*

## BREIZ SANTEL

...et tout s'en va!

MOUVEMENT pour la PROTECTION  
des Monuments Religieux Bretons

HOTEL DE VILLE - VANNES  
C. C. P. NANTES 1536-85

# TRIBUNE LIBRE DU MOUVEMENT BRETON

ABONNEMENTS - PROVISION — PROVISION : 10,00 francs pour 10 numéros — ABONNEMENT D'ESSAI A 10 NUMÉROS : 5,00 francs —  
- JEUNES - réduction de 50 %. — PROVISIONS pour 4 Cahiers-brochures : 10,00 francs — ABONNEMENT ANNUEL à 24 numéros : 24,00 francs —  
ABONNEMENT COMPLET : 35,00 francs — ABONNEMENT DE SOUTIEN : 50,00 francs. COMPTE CHÈQUES POSTAUX 754-82 RENNES

## NOS NUMÉROS SPÉCIAUX

- |  |            |
|--|------------|
| 1 — Le Mouvement Breton (Marchal) - 2me édition                                | 2,50 F.    |
| 2 — Galerie Bretonne (J. La Bénélais)  | Epuisé     |
| 3 — Point de Vue Gallo (J. Gallo)  | 1,00 F.    |
| 4 — Notre Nationalisme (Mik) - en réimpression                                 | 2,50 F.    |
| 5 — Yann-Vari Perrot (Ivor) - 2me édition                                      | 2,50 F.    |
| 6 — Quelques Points d'Histoire (Neven Henaff)                                  | Non publié |
| 7 — Fédéralisme Interne et Externe (R. Tugdual)                                | Epuisé     |
| 8 — Pour un Socialisme Breton (R. Glémarec)                                    | Epuisé     |
| 9 — Lettres Inédites (Taldir)  | 3,00 F.    |
| 10 — Des Conditionnelles Néo-Celtiques (Y. P. Sylvester)                       | 1,00 F.    |
| 11 — Discours de l'Abbé Maury (Introduction R. Tugdual)                        | 3,00 F.    |
| 12 — Le Point de Vue Moral et Religieux d. Celtes (M. Goz)                     | Epuisé     |
| 13 — La Querelle de l'Orthographe (R. Tugdual)                                 | 2,50 F.    |
| 14 — Les Celtes de France et de Gaule (Mamm Goz)                               | 5,00 F.    |
| 15 — Industries de Bretagne (R. Tugdual) Fasc. I                               | Epuisé     |
| 16 — Industries de Bretagne (R. Tugdual) Fasc. II                              | Epuisé     |
| 17 — Miroir Celtique (Yann Per Sylvester)                                      | 2,50 F.    |
| 18 — Limites et Possibilités d'une France Européenne (Bernard Delesalle)       | Epuisé     |
| 19 — Petite Histoire de la Bretagne Nationale (R. Pennek)                      | Epuisé     |
| 20 — Douze Poèmes Gallos (Louis)   | 2,50 F.    |
| 21 — Prénoms Bretons (Mikael)  | 1,00 F.    |
| 22 — Pensées d'un Jeune Nationaliste Breton (A. Ar Gow)                        | 2,50 F.    |
| 23 — Du Ralliement aux Causes Victorieuses (A. Le Baner)                       | 4,00 F.    |
| 24 — L'Antique Eglise de Celtie (Gutuatir Iltud)                               | 2,50 F.    |
| 25 — C'est par la tête que pourrit le poisson (J. K)                           | 1,00 F.    |
| 26 — An den gwenn diskiantet (Youenn Olier)                                    | 4,00 F.    |
| 27 — Les Deux Europes (Karel Dillen)   | 1,00 F.    |
| 28 — Broadelouriezh ha Gouennelouriezh (A. Heusaff)                            | 1,00 F.    |
| 29 — Ar Rinou nevet e Keltia (Lidoù nevezkeltiek)                              | 5,00 F.    |
| A paraître :   |            |
| 30 — France et Algérie Fédérées (R. Tugdual)                                   | 1,00 F.    |
| 31 — L'Antique Soleil sur La Celtie Nouvelle se lève - N° imprimé et illustré. | 3,00 F.    |

DES TEXTES SIGNÉS DES MEILLEURS AUTEURS DU MOUVEMENT  
anciens...

MARCHAL - MORDREL - HENAFF - TALDIR

et modernes...

R. TUGDUAL - R. GLEMAREC - R. PENNEK - A. LE BANER

ha brezhonegerion... YOUENN OLIER - ALAN HEUSAFF - G. PENNAOD, etc...

Nous éditons vite et diffusons :

**Tous textes et pamphlets Bretons et Français**